

OLLIVIER 343 B

CHANSON CLOAREC PEMPOUL.

Var eun ton superb

Entre gæric Pempoul ha stang an Abaty
Eus eur c'hloarec yaouanc o pour-u e s'udi,
Hac en deus composit eur zou d'e vestres coant,
Evit e bassetans ha dector tud yaouanc.

Divar mene Crec'h-Noa, pa veza em repos,
Me a hell hep fizia contemplier eiz paros :
Kerity hac Yvias, Perros ha Lanviniec,
Plouezec ha Plourivo, Ploenez, ha Plorennec.

Ouspen e contemplan er pevar elemant :
Ar môr gant e lestri e cos ez al levant,
An douar er c'huz eol fructifiet gant poan,
An aer a zious'h va fenn caë oc'h eguet an tan.

Ouspen e remergan costez tri dioces :
Sant-Brieuc ha Treguer, ha Dol hep tromplerez,
Extremite Bro Sauz ha Soumtelez Franç.
Hanvel scol ar vertuz, cabinet ar scienc.

Noblançou a blezanç decoret a goajou,
Quest-l. ha tiez goad carguet deus a armou,
Euzennou fertel, antouret gant Neptun,
Hac havrou frequentet var o zro zo commun.

Ma ve tior va lagat, en deffe plijadar
D'ar c'houlz n'apparis mui mad ena an natur,
O velet ac'hane mouvement an envou,
Sclerijen ar stered h'g ar planedennou.

Goethal, pa voan disqib d'Aristot ha Platon,
N'en devoa va speret hep satisfaction
Nemet o vedua var levriou ar scienc,
Ouz o c'honsideri n'em boa qen i assetans.

Amzer a vag peb tra, n'en deus mui a charmon.
Gouarnet ar ga o i am dalc'h en e lasso :
Eur pe-ho en Pempoul zo re grenn a ressort :
Am dalc'h da languissa en despet d'am oll effort.

Reculit oll adren, rarenteou Crec'h-Noa,
N'oc'h eus mui a bouvoar da rei d'am c'halon joa ;
Er gæric a l'empoul ena va fljadur,
Eno ma va Mestrez, eur gu-net dreist natur.

Calliop, Polymni, Terpsichor, Erato,
Unani, Melpomen, Euterpe, ha Cho,
Ha c'houi ive Thali, c'hoar leun eus ar furnez,
C'houi a voar an doare, me invoq hoc'h adres.

Exaucit ma feden, Jenitor, Jupiter.
Quit taît an dezert hac antreet en qær ;
C'houi a voar an doare, quittaît prompt ho plac,
It da gaout va mestres, gait din antren en græc.

Secudit Cupidon da essat e gounit.
Ouz e rebellion implic'h da oli gredit :

Gra dezi va c'haret qement a me c'haran,
Pe laq hi da zevi guemen er memes tan.

Poursuiv' n'i erfin, lavar dei, Immortel,
E deus e Kerity eur servicher fidel ;
Represen i dezi e zon prest da vervel,
Mat queudalc'h da veza em andret qen cruel.

Mercur, en bassader, tad ar sperejou mad
Messager eloquant, cas dezi va m'neat ;
Digor da zion espiet ha nij prout dre an aer,
Hep tenna da lalan, disq n'ebats en qær.

Abord-hi em reget, gra dezi compliment,
Sezis dre rezonnou a dre gomzon charmant,
Ha tenn eur cedolen qent retourn var da c'his,
Sim-t em av'ntach gant an dorn am languis.

Mæs mar choüf- bepret en e opinion,
Digas din lachesis, Atropos ha Cloton ;
Digas memes ar maro armet a ped gallout :
Dre ar maro driduez da rei fin d'am hirvoq.

Erfin bet diganti eul lincet griet mad,
Eun archet hac eur b'z evit fin va laqit,
Ha ma car va buez, e devo blijadur
Da viana d'am maro o rei d'in sepultur

Bess e deus pouvoar da gommand d'ar Maro,
Ha me demeus ma bez a zavo d'am giavo ;
Me zavo ac'hane, resuscitet gant gloar,
Evit e admira evel eud eit Lazar.

Biscoas an Ameriq daouest de oll bompad
N'e deus goüet guenet qer caër qen dernad,
Na bi-coas an Asi, gant oll fertilité,
N'e deveus produet nevelep rareté.

Disqen en qær Pempoul, qers dre ru an Illis,
Ha tech flechissa an objet am languis,
Ha na espern neira er seurt occasion,
Evit gonit e speret a rei joa d'am c'halon.

Impalaër puissant, monarq victorius,
Mab enna an envou, fidehte Venus,
Laq en e c'halon ar birlem am blessas,
Ma teuz en ber amzer evit ma restan yac'h.

Me stago ouz va brec'h d'orn divin Appelles,
Al hou caër em boutiq hac em pentr ann adrese
Da denna e fortret da gass d'an Occident,
Da gass ebars er Sud, en Nord el Levant.

Eur meonat ran c'hoas qent disqen er Menez ;
Me a garre plijout da galon ma mestres ;
Romenez ar Muset, bo pet a tention
Qent ma zin da repos canomp dezi ar zon.